

# KANTIK

## En enor d'Itron Varia Liskorno

### DISKAN

E pep amzer,  
Hon mamm dener,  
Chileoet hon pedenno,  
Hon sikouret  
Hon binniget  
Itron Varia Liskorno.

I

Na zo klevet  
Na bet gwelet  
Pije lezet hep sikour,  
Nep ho klaske  
Hag ho pede  
'Vit trec'hin peb enebour.

II

Hon diwallet  
Diouz ar pec'hed,  
Sellet ouzimp gant true,  
Er gwaleurio  
En trubuillo  
Roet dimp graso neve.

III

'Gwerc'hez tener  
Hon gwir esper,  
D'ac'h a westlan ma ine ;  
Em ezemmo  
Hag em foanio  
Evid oun pedet Doue.

IV

Peded bepred,  
Mamm vinniget,  
Evid hoc'h oll bugale,  
Gret mo devo  
Nerz ha graso  
Da nija da c'hloar Doue.